


j/  
AUTROU  
LOCHRIST AN IZELVET,



BEZIT SONCH EUS AR VRETONET.

---

E MONTROULEZ

E IZ LÉDAN, er Pave.



## CANTIC LOCHRIST AN IZELVET.

Var ton neve *Quadri*.

**D**re c'haç Autrou Done an Tad,  
Hac inspiration an Æl-mad,  
Hac ar zicour eus ar Verc'hez,  
E carfen compos eur varz nevez.

Abalamour d'eur Plaç santel  
A zo ebars en Breiz-Izel;  
Mar qerit donet d'e güelet,  
N'ho pezo qet amzer gollet.

En escopti côs a Leon  
Eus eur plaç a zevotion,  
E Güinevez mac'h ententet,  
Ebars Lochrist an Izelvet.

Güechal, en amzer ancien,  
E Lochrist e voa eur feunteun  
Pini a voa darempredet  
A bep brô gant pelerinet.

Mes, mar ententit, Bretonet,  
 Lec'h e voa da vont d'e güelet,  
 Dre ma rê eur miracl bemde  
 An dour demeus ar feunteun-ze.

En eul laouer ven zo eno,  
 E güeret Autrou Christ ato  
 E laqet an dud afflijet,  
 Gant an dour anezi goalc'het.

Deus ar feunteun-ze' cundue  
 Eur gorzen gaër hac a dole  
 An dour en eur zail, p'er c'herc'het  
 Gant enor bras en assistet.

Gant eur beleg g'arquet en guen,  
 Ar sacr, ar stol en e guerc'hen  
 A yê bemde da assistàn  
 Güelc'hi el laouer an dud olàn.

Ia, diouz reuq eun den bemde  
 Vije laqet el laouër-ze :  
 Ha dre c'braç ar Christ beniguet  
 Oll e recevent ar yec'het.

Ne qet fablou eo an dra-màn :  
 Ar virionez a lavaràn :  
 Qement a vije afflijet  
 E Lochrist a gave yec'het  
 Alafin kær a voe carguet

Hac endro dezi assuret  
 A lojennou d'an afflijet ;  
 A bep brô' teu pelerinet.

Ha monet tud eus ar c'hontre  
 Timat da c'holo'r feunteun-ze  
 Gant aon na deuze ar guernez  
 Er vrô hac er c'harter ivez.

An Autrou Christ a hermetas  
 Gôlo e feunteun dre e c'hrac  
 Dindàn an douar en Ihs,  
 Elêc'h ma er peder bemdeis.

Abaoue e zeo ranfermet,  
 Gant calz a dud bed dilezet :  
 Gouscoude e zeo eur plôç santel,  
 Mar deus certen en Breiz-Izel.

En eur laouer ven zo eno  
 E zeus grêt calz a dud salo ;  
 O Pedi ar C'hrist beniguet,  
 Soulajamant a zo bepret.

Pa viot en affliction,  
 Deut da Lochrist a vir galon,  
 Eno zo remejou excelant  
 D'an dud languis hac impotent.

Evit beza bet dilezet  
 Gant calz eus a belerinet,

## 5

E zeo hi an ancienna  
Eus plaçou santel ar vrô-mâ.

Evit compren ar miraclou  
Zo grêt hac a rêr c'hoas ato,  
D'o lavaret ha d'ho scrifa  
Eur mis antier ne deo netra.

Mes c'houi, Autrou Christ beniguet,  
Roit sclêrijen d'am speret,  
Da zisclêria d'ar Vretonet  
Darn ar miraclou oc'h eus grêt.

Commanç a rân d'ho recita,  
Gant graç ar Verc'hez Varia,  
Ha va Æl-mad am inspiro,  
Mar plij gouscoude eus d'ho zelao.

En Lochrist eun amzer zo bet  
Eun ozac'h a voa aplacet,  
Hac e bried a vir galao  
A roe d'ar paour aluzen.

Gouscoude eun devez a voa,  
Ma carfac'h entent an dra-mâ,  
Eur paour o clasq an aluzen;  
Eun dra horupl eo da gompren.

En em gavas e ty an dud-mâ,  
O clasq eun dra evit beva.  
Abalamour da Zoue e c'houlén,

Hac evit e vuez asten.

Peguement charitapl ma voant,  
Ar vreg neuze voe arrogant  
Ouz ar paour-quèz-se a c'houlèn  
En han' Doue an aluzen.

E moun güell bresset, emezi,  
Oc'h oza boued da dud va zy;  
Eor vech all me ho soulejo,  
Evit bremàn hit en ho tro.

Ar paour quèz, evit qementse,  
Ato bepret a c'houlenne:  
Roit din eun tam boued, emezàn,  
Rac e'hoant debri a meus bremàn.

Güell bellzone meustam debret,  
Va c'halon zo a gòs serret:  
En han' Doue, va zoulajet,  
Pe e varvin amàn assuret.

Ar vreg a lavaras dezàn,  
Gant ar goler an horruplàn:  
It eus va dôr, pe m'ho casse,  
Hac ar e'hi bras me zistago.

Antre a eure en coler,  
Distaga'r e'hi en bër amzer;  
Mes ne ra drouc ebet dezà,  
Ne ras qen nemet e c'huessa.

7

Cetu ar paour o huanada

Hac e galon o fatica

O velet an ingratiri,

Ne gave den d'e zoulaji.

Diouz d'or an ty e partias,

Dirac an n'or bors e varvas;

Daou guy a voa en e guichen,

Eun dra horrupl eo da gompren.

Gant ar c'hi a voa distaguet

Eun all a voa en em gavet,

Hac a chommas d'he cberissa,

Hep touch e nep fêçon outâ.

Pa deuas tud an ty d'ho boued,

Côs ha yausanq'ment astonet

O veled an den-ze maro,

Hep christen ganet var e drô.

Dirac an n'or bors voa chomet

Corf an den paour-ze deccedet,

Hac an daou guy en e guichen,

Eun exempl bras eo da gompren.

Pa glêvas ar vreg an dra-ze,

E vouele hac e teplore;

Allas! me zo caus, emezi,

Eus ar maleur hac an anui.

Ar c'hi bras a meus distaguet,

Hac ennes en deus e lazet.  
 Abalamour ma c'houlenne  
 Eun tam boued en hano Doue.

Dont a ras tud d'e visita.

Da c'hout petra voa êruet gantâ ;  
 En nep fêçon ne voa blesset,  
 Prest goude voe sebeljet.

Ar vreg, o sônjal amandi  
 He fot, hep douet na melconi,  
 A roas evit e liena

Roched, lincel da vont gantâ.

O clêvet eur malheur qer bras,  
 Calz a dud en em rassambblas  
 Evit güelet en entêri,

Gant calz a c'hiac har hac a anui

Da Güinevez e voe casset

Da antêri gant pep respet,

Hi a bêas ar véleyen

D'ober servich gantâ ha peden.

Pa voe ar vreg er guêr rentet.

Var he dol e deveus cavet

Hac he arc'hant hac e dillat,

Da gôves e zeas timat.

Bêleg ebet ne absolvje:

Da Rom e rânqas mont neuze,



## 9

Da gaout ar Pab da gôves gantâ,  
He fec'hejou, hep nac'h netra.

Ar binijen a acceptas,  
Ha diouz he zud e c'houlennas  
Goude ze da vont da vale :  
Va fried, na zalein morse.

He fried a lavaras dezi :  
Me a yêlo qerqent ha c'houi ;  
Mar da unan, e zimp hon daou,  
Ne meus qet damant da vadou.

Eur mab e devoa o tena,  
Hac a ambrassas da guenta :  
Hac he morc'h hema goude-ze :  
Adieu, emezi, va bugale.

Cetu int o daou o partia,  
O cass gante eun doublen vara ;  
Pa voent et pell eus ac hane,  
Tud en hent a êruas gante.

Ar Vreg neuze a lavaret  
Dirac an dud-se d'e fried :  
An arc'hant o poa din roet  
Var an dol er guær zo chommet,

Va fried paour, it davito,  
Er plac-mâ me ho tepordo ;  
Senti a eure prontamant,

Mont d'ar guêr da vit an arc'hant.

Evel ma voent dispartiet,  
 Ar vreg a yas en hent bepret,  
 Ha pa retornas er plac-se,  
 Voa êt e fried ac'hane,

Hac én commanç da hirvoudi,  
 Da vouela ha da zeplori;  
 Gant an anqen a voa goal vras,  
 D'ar guêr nenze e tistroas.

Goude' voent pemp bla varnuguent  
 Hep en em velet en nep hent;  
 Nac hep biscoas elêvet hano  
 An eil eus eguile anezo.

O veza ne glêve hano  
 Eus e bried, nac he c'hêlo,  
 Gant an amzer e temezas,  
 Eun eil pried a eureujas.

Allas! m'en devije gouezet  
 E voa beo e guenta pried,  
 N'en devoa qet grêt an dra-ze;  
 Glac'har avoulc'h en d'oe goude.

Ar vreg en Rom pa êruas;  
 Dirac ar Pab en em strincas  
 Da c'houlén outàn pinijen;  
 Hac eus e fec'het absolven.

Ar Pab a ordrenas e c'has  
 Evit he fot gant eun hast vras  
 Ebar en cambr ar binijen,  
 Ma laqet ar güell bec'herien.

Ha rêi eno dezi neuze  
 Bara ha dour evit tri de,  
 Ha lin evit dont da neza  
 Epad tri de hep heana.

Bras eo madelez un Doue:  
 Eun amzer e voe er gampr-se  
 Hep caout nep memor anezi,  
 Ma sonjot voa maro enni.

Pa voe digoret varandi,  
 Voa o neza, yac'h ha dizourci;  
 Ma voe tennet eus ar gampr-se,  
 Absolvit gant ar Pab neuze.

Goude eun den cöz a gavas,  
 Humblamant outi a c'houlennas:  
 A belec'h e tenit na ma zit,  
 Va mignonez, din livirit.

Biscoas me n'ho quëlis amâ;  
 C'houin'en doc'h qet eus ar vrô-mâ.  
 Ouzoc'h, den mat, ne nac'hin qet,  
 A Vreiz-Izel oün assuret,  
 Eus a Lochrist an Izelvet,

Eno emedi va fried.

Va fried ha va bugale  
A meus me grêt glac'har deze,  
Eus o beza abandonet,  
Me gret e carfent va güelet :

Mardoc'h contant, meanden-ze,  
Da vonet d'o güelet ive,  
Abars nemeur, gant graç Doue,  
Ec'h êrufot en ho contre.

Ho pried hac o pugale,  
Souden e velot aneze,  
Hac ec'h allot o c'housoli  
En o glac'har hac o annui.

Pa êrufot en Izelvet,  
E ti'n Autrou Christ beniguet,  
Grit va gourc'hemenou dezân,  
Ha lavarit da Grist er c'harân ;

Me eo ar c'halvez en deus grêt  
E imach pa zeo bet formet.  
Eur voalen ven am eus amân  
Hac a roin deoc'h bremân ;  
Ho pried hac ho pugale,  
Souden e velot aneze.

Qerzat a ras qen excelant,  
Ma teuas d'e brô prontamant,

E ty he zud en em rentas ,  
Ar voalen ven e c'hunduas.

Pa êruas e ty he fried ,  
E c'houlennas beza lojet  
Gant respet hac humilite ;  
Christea ganet n'e auaye.

Greg an ty a voa arrogant ,  
Hac a respontas prontamant :  
Evit amàn ne lojfol qet ,  
It-u a lesse pa guerfet.

He fried er guêr ne voa qet ,  
Hac e bugale o clêvet  
O mam-baour e c'houlenn loja  
Ouz o lesvam qen humbl ha tra.

Gant truez outi e voe lojet  
Gant ha bugale assuret ,  
Is. en despêt d'al lesvam-ze ,  
Repuet mad e voe gante.

Ar vreg paour-ze pa voe antreet  
En he zy etal he fried ,  
Var eul laouer ven ec'h azezas ,  
Reposi enni a c'houlennas.

He merc'h dre mateue ha maze ,  
D'e breur bêleg a lavare :  
Gant ar vreg-màn oun estonet ;

P'e güelàn e meus poan speret,  
 Rac ar vam e deus hor ganet  
 Ha c'houi ha me, va breur bêleg,  
 A gavàn outi henvel mad,  
 Qement e tom outi va goad.

Emedo eno dirac an nôr;  
 He mab a deud e c'haout gant enor;  
 Gant respet hac humilite  
 E crogas en e vam neuze.

Da dal an tân e voe casset  
 Gant e merc'h hac e mab bêleg,  
 Ma voe laqet da ~~areza~~  
 E plaç e mab e-unan gantâ.

He merc'h dei neuze a voeic'has  
 He zreid gant humilite vras;  
 Ha pa velas e gar merqet,  
 E lavaras d'e breur bêleg.

Va c'halon a lavar din bepret  
 Eo ar vreg-mâ e deus hor ganet;  
 He gar zo ive cleizennet  
 Evel gar va mam assuret.

Ar bêleg ne ra seblant ebet,  
 Qen a voe o c'hoan preparet;  
 Mes neuze e roas e youed  
 D'ar vam e devoa er ganet.

E lesvam o veza fachel,  
 E deus lavaret d'ar bêleg;  
 Ne rac'h qet dia qement a stat,  
 Na qenebeut a rac'h d'ho tad.

Ilep en em facha, ar bêleg  
 A eure a zever bepret;  
 Ma commandas d'e c'hoar zeuze  
 Caout soign mad demeus ar vreg-se.

Digassit dillat, emezàn,  
 Va c'hoar, evit rei d'ar vreg-màn  
 Da chench, ma zayo da gousqet:  
 Em güele e vezo laqet.

Rac evit feteiz ne gousqan;  
 En orêson en em laqàn,  
 Ma vezo bolonte Doue  
 Ma coudoia ervat va boe.

E c'hoar e devoe eur joa vras;  
 D'e armet ractal e qerzas  
 Da denna eun habit d'he mam,  
 Hac eun invis voa nevez flam.

Pa voa ar vreg-se habillet,  
 Ha dillat propr dezi güisqet,  
 E lavaras e c'hoar d'e breur:  
 Homàn eo hor mam a dra sur.

Ar bêleg a respont dezi:

Me s'ònj din ive coulz ha e'hui;  
 Mes qemeromp paciantet,  
 Gant an amzer e vo gouezet.

En güele he mab e reposas;  
 Homàn zo eur garantez vras  
 Etre ar vam hac ar vugale,  
 Abars finissa o bue!

P'oa'n ozac'h er guêr êruet,  
 E lavaras dezàn e eil bried:  
 Eur mab bêleg oc'h eus amàn,  
 Hac a rñi fin vad, a gredàn.

Eur vreg a zo amà lojet  
 Gant ho merc'h hac ho mab bêleg,  
 En deus en e vele laqet;  
 Ma n'am o'hredit, hit da velet.

An ozac'h paour, vel ma clêvas,  
 En coler er gampt e pignas;  
 P'en devoe güelet ar virione,  
 E c'houlen eus e vab neuze:

Lavarit din, va mab bêleg,  
 Petra eo eta a s'òjjet;  
 Ne gavàn qet mat an dra-màn  
 Deoc'h-u na d'ho seurt, a gredàn.

Epad ma voe en orêson,  
 Ha ma teu da douch e galon:



Tavit-u, va zad, emeàn,  
Abalamour da Zoue er gràn.

List va lesvam da lavaret,  
Ar pez a garo da brezec:  
Nep a loj a vezo lojet;  
Ober ervat ato zo dleet.

Cetu an dea-ze consolet  
O clêvet comz e vab bêleg:  
Buan eus traon e tisqennas,  
Na droug ebet ne lavaras.

Antrouos vintin pa zavas  
Ar vreg paour-ze, gant eus hast vras  
A yas da zivisqa he dillat;  
Da rei d'e merc'h a galon vad.

Ar bêleg d'e c'hoar a lavar:  
C'houi oc'h eus calz dillat, mer goar;  
Leret a ellit ar re-ze.

Gant ar vreg paour-ze'n han'Doue.

He merc'h e devoa calon vad,  
Qercoulz hac ar bêleg e mab,  
Hac a-laras d'he mam neuze:  
Miret a ellit an dillat-se.

Cetu oc'h ho zrugarecât,  
Ha gouleg neuze ouz he mab  
Hac en vije e vadeles

Laqat an deiz-se e c'hôves.

Ia, emezàn, me ray se,  
M'am be pouvoar me rae ive :  
Pa deuy'r vèleyen d'an ilis,  
Me laqay certen ho côves.

Ho côves ha communia,  
Ha goude' tijunfot amâ,  
O c'hortos an oferen-bret,  
Em oferen neve ec'h asisfet.

Ia, emei, asista a rin,  
Hoc'h oferen neve a glêvin ;  
Mes communia na rin qet ;  
N'o po hoc'h oferen celebret.

Reir e ve ar yun, emezàn,  
Marteze goude e vec'h eian,  
Communiet ha dijunet,  
Hir vo an offiç assuret.

Ne rin nac an eil nac eguile,  
C'houi fell din am c'hommuaise,  
Goude m'ho pezo celebret,  
Mar plich ganêc'h, hoc'h ofern-bret.

Var ze e zeont d'an ilis,  
He mab a laqaz e c'hôvez,  
Ma lavaras piou voa neuze  
D'ar bêleg-se e c'hôvesse.

Ar c'hôvessour a voe secret,  
 Ar vreg-se ne zisclêrias qet  
 N'en doe e mab oferennet,  
 Hac hi gantàn communiet.

O veza ganti còvesset,  
 Ha gant he mab communiet;  
 En orèson en em laqas,  
 Ha d'an Autrou Christ e laras :

Goure'hemennou oc'h eus emezi,  
 Digant unan dreist pepini,  
 C'houi, Autrou Christ beniguët,  
 Mar plieh ganeoc'h va c'hlêvet.

Digant eus den còs a bel brô,  
 En deus commandet din, Autrou,  
 Lavret deoc'h en ho carre  
 Ar c'halve pini oc'h eure,

An drede gâech ma lavaras,  
 An Autrou Christ a inclinaz  
 E benn d'e beultrin assuret  
 Hac abaoue e zee chommet.

Evit trugarecât ar vreg-se,  
 E ras an Autrou Christ an dra-ze,  
 Ha disquez d'an oll dre e c'hraç,  
 E voa ar vreg-se santel bras.

Ha pa voe he mab disqennet

Demeus an Auter beniguet ,  
 Er sacristiri ec'h antreas ,  
 Da zivisqa en em laqas.

Pa voa ouz en em zivisqa  
 Ar c'hôvessour a lar deza :  
 Ar vreg oc'h eus communiet  
 Eo ar vam he deus ho cauet.

Din-me e deus-hi lavarret ,  
 Mes deoc'h-u ne lavarje get ,  
 Qement ho quële chagrinet  
 C'houi hac ho c'hoar assuret.

Gant eun anqen hac eur joa vras  
 Da gavet e vam e teuas ,  
 A voa oc'h ober orëson  
 D'an Autrou Christ a vir galon.

Evit merq an doublen vara  
 A voa bet et gant ar vreg-mâ ,  
 E voa ganti lod anezâ ,  
 Hep beza loed, qer fresq ha tra.

En he dorn e voa eur billet ,  
 Den ne alle e guemeret ;  
 Mes pa deuas e mab bêleg ,  
 En tennas hep dale ebet.

Er billet-se e voa-scrifet  
 He buez antier het a het ,

Pa lennas e mab anezàn,  
 Ec'h estone an oll gantàn.

Allas ! va mambour, emezàn,  
 Ignorant voan a gement-màn ;  
 N'osien qet voa c'houi assuret  
 Ar vam en deveus va ganet.

Gant carantez a glac'har bras,  
 E varvjont o daou var ar plac,  
 O zud var al lec'h ne doant qet,  
 Ar c'hêlou dezo voa casset.

E doant o prepari o boued  
 Hac an traou al voa dleet,  
 Evit rei d'an dud da leina  
 Pa glêvjont oll ar c'hêlou-mâ.

He merc'h en instant ma clêvas,  
 Hac e fied tout a lezas  
 Qement a voa en abandon,  
 Gant glac'har bras en ho c'halon.

Pa edont o vont d'an ilis  
 E varvjont o daou assables  
 En creiz an hent dirac an oll,  
 Mac'h estone ar bed en oll.

Ous o gêlel er memes de  
 O vervel var o pevare :  
 An tad, ar vam, ar vugale,

Homâ zo anqen gouscoude.

Prest goude voent sebeliet,  
 Evit ma vijent entêret;  
 Da Güinevez e voent casset  
 Gant peb enor ha peb respet.

Tri anezo eno a chommas  
 Da entêri gant respet vras,  
 An ozac'h hac e vab bêleg,  
 Hac ar vere'h a voe entêret.

Mes ar c'har m'oa ar vam garet,  
 Pa êruas gant ar vêret,  
 Al loened crenn a zistroas,  
 Den o arrêti ne ellas.

Ma laras an dud a illis  
 O lezel da vont en o divis,  
 Elec'h ma plijo gant Doue  
 E vije entêret ar vreg-se.

Pe edont tost da borz ar vêret  
 Ebars Lochrist an Izelvet,  
 Al loened crenn a arrêtas,  
 Hac ar c'har eno en o flaç.

Tennet e voe ar c'horf neuze  
 Eus ar c'har hep difficulte,  
 Hac an dud voa oc'h assista  
 En ilis a zoug anezâ.

Ebars en ilis pa antreas,  
 An Autrou Christ a zisqueuzas  
 Ar plaç ma vije entêret  
 Gant e viz d'an assistantet.

Eno e c'horf voe entêret,  
 Gant peb enor ha peb respet,  
 E ti'n Autrou Christ beniguet,  
 Diandan e dreid e voe laqet.

Da ben nombr bloaveziou goude  
 E vbe digoret ar bez-ze,  
 Hac e caviot an arched enna  
 Qer yac'h evel m'oa da guenta.

An arched neuze voe tennet  
 Eus ar bez hep caout drouc ebet,  
 Hac abaque e zeo chommet  
 E ti'n Autrou Christ beniguet.

Nep a glêvo an histor-mâ,  
 Oc'h eas clêvet da recita,  
 Zo crissoc'h eguet an tigret,  
 Ma na vez o c'halon touchet.

Pa zay an dud paour da dal ho tor,  
 Respontit dezo gant enor,  
 Balamour d'an Autrou Doue,  
 Memprou Jesus eo ar re-ze.

Roit a galon vad an aluzen,

24

Ha dalc'hit mad d'an oferer,  
 D'an œuvrou mad, d'ar pedennou,  
 Ha Jesus ho recompanço.

Evit conclui ha finissan,  
 A greiz va c'halon ho pedan  
 Da zont oll gent devotions  
 Da di'n Autrou Christ d'ar pardon.

Eno certen eus religou  
 Eus ar re gaëra zo er vrô,  
 A zo precius bras meurbed  
 Diou vech ar blas ezont douguet,

Da Bont-Christ o c'hasser qenta,  
 Da dy an Itron Varia,  
 Deiz gouel ar Mae ma vevont,  
 Ha da voel Christ vezont douguet

Ra-se eta na vanqit qet,  
 Deut da Lochrist an Izelve,  
 Vit gounit an iudaljanço  
 Ar bêvar a vis Güengolo.

Neuze mar ar solanite  
 Hac ar pardon bras er plaç-se  
 Roet eo deomp da bedi Jesus,  
 Ma vezo ouzomp truezus.

FIN.